



PETRA
SONJAL
EUZ KOMZOU
GISCARD
E PLOËRMEL ?



KRISTIAN
BRISSON :
EUN DIBAB



EN ENOR
D'AR
GARANTEZ
NAIG
ROZMOR



MEURZ



N° 3

MEURZ 1977

BRUD NEVEZ

KELAOUENN VREZONEG MIZIEG

N° 3 - MEURZ 1977

Rener : Jakez Salaun
Sekretour : Andreo Merser

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da : BRUD NEVEZ, 6 ru Beaumarchais, 29200 BREST.

Priz an niverenn-mañ : 7 lur

Koumanant-bloaz : - priz ordinal : 40 lur
- koumanant-skoazell : azaleg 50 lur
- studierien, soudarded : 30 lur
- liseaned : hanter-briz, 20 lur
- broiou estrañjour : 50 lur

Eur houmanant-bloaz a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da : Brud Nevez, 6 ru Beaumarchais, 29200 BREST.

Ar chekennou-post a zo da veza laket war ano P.-M. Mevel, C.C.P. 1499-55 Roazon.

Disklêriet hervez al lezenn : kenta trimiziad 1977.

C.P.P.A.P. : niv. aotre euz ar 27.4.64

Ar merour : P.-M. Mevel

Moulet gand Ti-moullerez ar Martolod, er Gelveneg (Imprimerie du Marin, le Guilvinec).

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre d'embann eur pennad diwar Brud Nevez, heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e « Brud Nevez », n'emaint ket da veza laket war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset en-dro ma vez tu.

TAOLENN

- A. Keravel : Diwar-benn promesa Blouarzel	P. 2
- K. Brisson : Eun dibab	P. 5
- Charlez ar Gall : E skeud ar binvidigez	P. 15
- J. Salaun : En enor d'ar garantez : Naig Rozmor	P. 19
- P.-M. Mevel : Ar bagou dre lien. Breiz kemeret evid eur vengleuz	P. 22
- Brud Nevez oh embann eul leor kenta	P. 23
- Brud ar yez hag ar vro	P. 24

AR STOURM EVID AR BREZONEG

DIWAR-BENN PROMESA BLOUARZEL

... « Bez e roan da houd, evid respont d'eur mennad diskleriet gand ho Kuzul-Rannvro, emañ troet ar gouarnant da zivizoud gand ho pennadureziou eur skrid-diazez a vo e bal harpa derhel en o zav oll stummou sevenaduriou Breiz. Ra vo savet ar skrid-se e 1977, ma hello beza lakeet da dalvoud e penn kenta ar bloaz a zeu »...

Evid kalz a Vretoned e vo bet eun tamm mad a zouezadenn kleved Prezidant ar Republik, an Ao. Giscard d'Estaing, o tistaga seurt komzou e lodenn genta e brezegenn, e Plouarzel/Ploërmel, d'abardaez an 8 a viz c'hwevrer. Kemeret eo bet an diskleriadur-ze gand darn zo evel o tiskouez eur veizidigez nevez euz kudennou Breiz hag ar « Rannvroioù » a-berz an den a zo e penn ar Stad...

EUN DRO-SPERED DISHENVEL

Gwall vesket eo ar menozioù eno, koulskoude, hag e heller en em houlenn petra zoñj pe petra oar e gwirionez Giscard d'Estaing a-zivoud talvoudegez.

sevenadur pobl Vreiz ha sevenaduriou ar c'hweh all a boblou a gaver e « rannvroioù » ar Republik. N'emaon ket avad o vond da glask diveska ha dirouestla an nebeud frazennou-ze distaget e Plouarzel. Anad eo, disheñvel-krenn an dro-spered a zanter enno ouz an hini a vez o vleina ar re a stourm evid sevel eur Vreiz nevez, feal a-dra-zur d'he yez ha da zevenadur he fobl, hogen troet dreistoll da labourad evid mond war-raog ha n'eo ket tra ken evid « derhel » en o flomm hengovniou koz ar vro...

Evidom-ni, n'eus nemed eun dra hag a dalvez ar boan goud a-zivoud komzou Plouarzel : petra a deuo marteze d'o heul, petra a hello beza lakeet e-barz ar skrid bet gouestlet e brienti, ha pedavare e vo implijet ar reolennoù anezañ, mar bez klasket o implij e gwirionez.

GWELLED SKLER

Ha meur a dra a zo da lakaad skler war-wel, en afer-ze :

- Deut eo emskiant o gwirioù e-mesk ar Vretoned da veza kreñv awalh evid lakaad ar re a zo e penn ar Stad da deurel evez hiviziken ouz o goulennou. Ha êz eo kompren perag emaint nehet, d'an ampoent-mañ.

- Red eo digas da zoñj penaoz, e-barz mennad Kuzul-Breiz ar 27 a viz gwengolo 75 (bet votet evid eun eil gwech d'an 11 a viz c'hwevrer 76). - ar mennad ma fell dezañ Giscard d'Estaing komz anezañ, - e kaver pemp goulenn resiz o tenna da gelenn yez ha sevenadur Breiz, ha ne gaver ennañ nemed kement-se.

- Ar pezh a oa bet goulennet dre skrid gand Kendalc'h, abaoe eur pennad, digand Prezidant ar Republik, eo ma vefe skoazellet evel ma tere labour ar strolladoù sevenadurel breizeg, dre hantererez Kevrennoù Breiz an Aferioù kulturel. Eun dra a-bouez, re wir eo, disheñvel avad diouz goulennou Kuzul Breiz e-barz mennadoù meneged amañ a-uz.

- Ahendall, goulennet eo bet ive, - war-eeun ouz Giscard d'Estaing, pa oe roet tro da zileuridi ar strolladoù breizeg komz outañ, d'an 9 - a viz c'hwevrer d'abardaez, - ma vije ledannaet programou brezoneg ar radio hag an tele, hag ouspenn-ze, ma vije aotreet ar Huzul-Rannvro da voti yalhadou evid ma helpe kerzed an « Institut Culturel de Bretagne » (a zo bet nevez zo divizet rei dezañ da ano e brezoneg : Skol-Uhel ar Vro).

EUR RESPONT GOULLO ?

Ma ! daoust hag e vo kavet kement-se oll e-barz ar « skrid-diaze » a vefe o vond da aoza ? Ar renta-kont kaset gand Ivonig Gicquel euz an diviz a zo bet etre Giscard d'Estaing, d'an 9-2, gand dileuridi Kendalc'h, B.A.S. ha War 'l Leur, ez eus ennañ peadra disfioud e teufe netra nevez evid kelenn ar brezoneg diwar bromesa Blouarzel. Rag, evid gwir, n'eus bet gouestlet seurt ebed war ar poent-se ! Hervez ar renta-kont, ar « Charte » ne hello ket diskoulma kudenn ar brezoneg...

Ha koulskoude, re wir eo ive, embann e-neus greet Prezidant ar Republik e oa o respont ouz goulennou Kuzul-Breiz. Eur respont goullou an hini eo, neuze ?... Ha ne vefe ket kement-se ober goap ouz Kuzul-Breiz, - hag ouz an oll Vretoned ? Perag e-neus komzet evelse ? Daoust hag eun douelladenn ne vefe ken, ar bromesa-ze ?

En va ano va-unan e ran ar goulenn, hogen re zur on e talvez hennez ar goulenn-ze evid eun toullad mad euz ar re a stourm evid ma vo sentet ouz gwiriou or yez !

Eun nebeud all a boefichou a zo c'hoaz da veza digaset sklerijenn warno hag a vefe re hir komz anezo amañ diwar vremañ. Ken luziet eo an traou ma 'n-eus kavet gwell Kuzul-Breiz, deh, 16 a viz c'hwevrer, dalea (ahann da begoulz, n'ouzer dare !) a-benn divizoud da vad petra vo greet gand Skol-Uhel ar Vro, penaoz e vo renet he labour, ha dreistoll penaoz e hello beza pèet ar mizou-kerzed ha ne vo ket aotreet an Asamble Rannvro da gemer war he hont.

A. KRAVEL

K. BRISSON

EUN DIBAB

Sahet e oa e drakteur gand Pêr. Hag eñ da behi. An aridennad malloziou a zistagas a reas vad dezañ, eun drugar ! E lod a drubuillou e-neveze bemdez-Doue ha fêz e oa ken e oa. Gand se ne oa ket pres warnañ d'en em gavoud er gêr. Heb mar ebed e trenkfe ar zoubenn adarre etre Dell, e wreg, ha Pol, e vab. Ha neuze ez afe er-mêz gand ar gouez e vije, kuit a dabutal gand an eil pe gand egile. Ne oa ket mestr en e di ken, ha koulskoude e oa pase-poent kompeza an traou.

Gand mil boan e teuas Pêr a-benn da zizaha e « mekanik-an-diaoul » evel ma ree dioutañ, ha dao d'ar gêr. Izel e oa an heol ha yenijenn ar zerr-noz a grogas ennañ a-dôl-trumm. A-dennou hir e leunias e skevent, ha da huanadi en eur vond gorreg da gaoud e goan. Kavoud gras a reas digropa e zivesker a oa merien enno goude keid-all a amzer heb bale.

« Gand ma vo prest ar zoubenn », a hrozmolas outañ e-unan. Edo etre daou pa 'n em gavas war dreuzou an nor. Lôskentez ne oa ken. Ha lôskentez e oa ivez pa ne grede ket lavared e zoñj. Daoust hag e zoñj e-noa greet zoken ? Tchet e oa da veza a-du gand e vab aliez-kenañ. En tôl-mañ, avad, e kave dezañ e oa eet pell an traou.

Mond a reas tre. Sioul e oa peb tra war-bouez trouz al listri a oa Dell o lakaad war an dôl. Edo Pol o lenn en e gorn, dizeblant-kaer euz kement a hoarveze endro dezañ.

« Petra 'vo da goan, Dell ? »

« Yod fritet. Sell, tap din al lêz. » Selled a reas ouz he gwaz. Anad e oa n'edo ket en he bleud en deiz-se kennebeud.

Simud an dud ha teñvelijenn an noz a oa gounezet an ti ganto. Mond a reas Pol da elumi ar goulou.

« Amañ 'vez tanfoeltret an arhant, hardiz, pa laran deoh ! Uza ar goulou pa vez deiz, drebi « karg-ha-bark », ha beva diwar goust ar re all. Trist eo, pa zoñjan ! » Ha dalhmad e selle ar vaouez ouz Pêr, o hortoz eur respont pe eun asant digantañ. Hemañ, ha ne oa ket êz e spered, a yeas tavedeg da azeza ouz an dôl. Hag o-zri, neuze, da zrebi o hoan heb ranna grik.

Lonket e voued gantañ, Pêr a danas e gorn-butun ha dre ma sache warnañ a frapadou hir e troe en e benn soñjou du a-zivoud e diegez.

« Jañ-Pi Waz-Wenn 'zo eet da zoudard. Sed aze hag a zikouro e dud, yañ ! » a rannas Dell a-greiz he labour.

« Eur pôtr fur ha toud, kea ! » Pêr a yeas eul liou fall en e gerhenn pa glevas e vab. Prestig goude e ouezas e oa deut ar respont en desped da Bôl o veza ma oa ruz e zremm gand eur reuziad keuz. Gouzoud a ree an tad penôz e klaske ar pôtr

yaouank mond d'e vamm dre voder; penôz e klaske lakaad anezi da gompren e vennad ha cheñj he 'fenn a-benn ar fin.

« Nozvez vad deoh ! » E-pad eur boutadig e kredas da Bêr e vije eet Pol daved e vamm. Petra e-nije lavaret dezi ? Ha komz e-nije greet outi er yez-se hag a zinahe distaga an disterra ger enni abaoe m'e-noa greet e zoñj, greet e zibab ?

« Ez an da gousked ie », eme Bêr. Echu an devez ha gantañ ar vuhez tenn a rene an dud eno. Gand an noz e teufe ar peoh - ar gwir beoh, hini ar galon, ne oa ket anezañ, evelato.

Nebeud-ha-nebeud e sioulaas peb tra nemed trouziou an noz a luskell huñvreou mab-den, hag a vare da vare, hirvoud eul loen o keja gand eur maro a-greiz e gousk.

*
* *

Ne oa ket kuzet c'hoaz an heol pa grogas ar fest-noz. A-vandennou e tirede ar yaouankizou warzu al leur-zañsal - leur goz eur vereuri bet eur maner gwechall. Eun toulladig tud a oa gand eur gavotenn p'en em gavas Pôl hag e genseurded, pôtréd ha merhed, brezoneg braz ganto. Edont o paouez echui eur vodadenn hag ar gôz a yee c'hoaz endro. 'Bugale ar Startijenn' a reent outo o-unan o veza ma oa eul leor nevez-deut er-mêz dindan an talbenn-ze. Ha startijenn a oa ganto, a hellit kredi, pa ne vefe nemed evid pregi e yez ar vro.

« Fiziañs vraz am-eus », eme unan, pôtr kreñv ha fesonet mad an tamm anezañ, eun daoulagad birvidig o skedi en e benn.

« Me 'm-eus ie, med beh 'zo du-mañ, mestra ! » a eilgerias eur veleganez, mistr he horv, koantiri a-leiz o para warni.

Evid da Bôl beza distagellet mad, ne oa ket e stad da flipad. Kaer e-noa gwaska war e imor, ne oa ket evid ankounac'haad penôz e veze kont er gêr.

« Ma ! Ganin-me 'oa bet 'giz-se 'pad daou viz », a oa bet respontet dezañ gand eur pôtr, ha ken dicheg ha tra e-noa lavaret ouspenn :

« Kement am-eus torret o 'fenn deo ken o-deus ranket plega ! »

« Gand ma ruzin beteg ar bachelouriez, n'eo ket chalet va zud gand ar peurrest », eme eun all.

Ma oa têt da lod, lod all ava ne gredent ket fougasi gand an diêz e oant lakeet. Delher penn d'o zud ? Eur gwall afer e oa memestra.

E berr gomzou, divizet o-doa e vije brezoneg er gêr hag e talhent d'o ger. Anad deoh ne oa ket heb freuz ha reuz. Hogen, hervezo, ar gwir a oa ganto, hag ar gwir a vije treh d'ar bed e-giz ma troe d'ar mare-ze.

Prestig goude e oe c'hoarz ha youh ganto. Ne oant ket bet pell o kregi gand ar horoll ha setu neuze kaset kuit ar zofñjou du diwar o spered ha laouenêt o halon o klevet an toniou drant pe melkoniuiz distaget brao gand eun toullad sonerien a ouie euz ar choaz diouz ar bombard, ar gitar ha kement benveg a zo. Ha den ne skuize o trei, o lammad, ken e oa bamet meur a hini ouz o selled.

Tud war an oad a oa eno ivez, med ne zansent ket nemeur. Lod diouto, ha ne oant ket evid ankounac'haad gwalldroiou ar brezel diweza, a zante penôz e helle eur fest-noz beza braz he 'ferz war spered ar yaouankizou. Ha pa oe deut poent an diskuiz e savas eun tammig trouz. Dizale e oe

tommet ar pennou, darn gand ar chistr, darn all gand ar chouchenn.

« Pôtred Breiz-Atao int toud », a zistagas unan, têt dezañ.

« Genaoueg 'zo ahanoh ! 'Oan ket ganet pa 'z eus bet ano neo ! »

« Genaoueg... genaoueg... Ha c'hwi, chomet war lerh gand ho prezoneg. 'Peus ken med selled endro deoh. Ar re yaouank ne ouzont ket ken a vrezoneg. Echu gantañ ! »

« N'eus ket 'n êr da vea maro pa glevan ahanoh, da vihanna ! »

« Me 'oar brezoneg, ya ! Ha gweloh brezoneg evid ho hini zoken. Med n'eo ket eur strollad pennou drol egistoh hag a jeñcho an traou. Kit da zeski sôzneg 'ta. Sed hag a rentfe servij deoh ! »

« Ha ma 'z eo gweloh ganeom deski brezoneg ! Hañ ! 'N dra-he 'zell ket ouzoh. »

Hag an divizou a steuzias e-mesk ar zavar a groze muioh-mui.

« Pôtred an tu kleiz, mad d'ober grev ha da lakaad dizurz e peb leh... » a oe klevet c'hoaz. Koulskoude, den ne gendalhas gand ar gôz o veza ma oa krog an dafis endro.

Tost da darz an deiz e oa hag edo c'hoaz hiniennou a kantreal dre ar horn-bro. Distanet e oa ar sperejou. Fêz e oa ar horvou. Gand ar goulou deiz, avad, e stagfe ar stourm adarre. Neuze e lugernfe ar goanag e meur a galon en amzivin.

*
* *

« Pa 'm em gavo Pêr er gêr e vo tommedig dezafñ c'hoaz, evel peb sul da noz ! » Ha Dell da zoñjal er vuhez haro he-doa da houzañv gand he den.

« Kit da weled petra c'hoari gantañ en e benn ! » emezi etre he chouk hag he hiviz.

Re wir e oa. Eun den ennañ e-unan e oa Pêr techet da veza, dreist-oll abaoe ma veze reuz ha freuz gand Pôl hag e vrezoneg. Diêz e oa dezi gouzoud pe 'oa an ozah ali gand e vab pe ne oa ket. Pez 'zo, Pêr a yee e brezoneg gand Pol, padal e tinahe-hi komz outañ ken ez afe endro e galleg. Abalamour da ze e oa savet eur voger etre an daou bried; eur voger a oa anezi kein he gwaz pa deue an noz - eur voger vud ha digas : kein he gwaz troet outi. Echu e oa an deneredigez a oa bet kenetrezo; echu e oa an dousder a gave-hi en e zivreh pa skrije dindan ar boan pe ar glahar. Hag anad e oa dezi penôz he horv distummet ha kaledet ne vije ken gouest da zihuni c'hoantou morgousket kuzet don gantañ.

Koza 'rafe evel-se heh-unan-penn, drebet hag uzet tamm-ha-tamm ken na 'z afe alese pa ne chomfe ken nemed ar relegou anezi ! Nemed hag eur maro trumm a zammfe anezi, e oa tonket da ren eur vuhez reuzeudig...

A-veh m'he-doa klevet anezañ o tond tre. Ne welas ket en e zaoulagad an elvennig a veze kustum da lufra enno pa veze diwar eur banne re. Reud ha sonn war e zivesker, mond a reas Pêr da jefñch e zillad hag e voutou evid mond war-dro ar chatal.

« N'eo ket deut Pôl c'hoaz ? »

« Ro peoh din gand hennez ! » Dicheg e oa deut ar respont ganti. Eñ, avad, ne reas van.

« Gwelet 'm-eus anezañ er vourh. Laret 'n-eus din e teufe da zikour ahanon. »

« A zo nevez, 'vad ! »

Eur reuziad droug a zavas enni peogwir e oa bet grêt ano anezañ. Kement a hoarveze a oa froudenn ar pôtr ar penn-abeg anezañ. Tangi ar Hleuziou Braz 'ni 'n-oa kroget gand an abadenn hag e dud a oa mantret o soñjal penôz e oa o mab kirieg a gement a zigoueze er harter. Eur halzig a dud a oa erru skuiz gand o bugale. Tra m'o-doa grêt o seiz gwella da zevel o bugale e galleg - nag o-doa bet da houzañv er skol abalamour d'ar brezoneg ! - setu ma oa pôtréd ha merhed an tro-war-droiou krog da addeski ar yez. Red e oa dezo anzav, avad, ne veze nemed brezoneg ganto pa gomzent ouz tud a oad dezo pe kosoh; med eur boaz ne oa ken. Esoh e oa bet lakaad ar gwiskamant e fofis an armel hag, en em wiska e-giz kêr. Erfin, ar galleg ive a houneze tachenn ha tachenn.

Koulskoude ne helle Dell miroud a zantoud he halon a vamm o vond bihan en he hreiz pa stage Pôl da gomz. Gouela doureg he-doa grêt meur a wech. Ma ! petra 'reoh ? Dreist d'he youl e oa; ne oa ket evid distaga an disterra bomm brezoneg gantañ.

« Diwar hizio, ne vo ken 'med brezoneg ganin ! » hag e-noa dalhet d'e her.

Setu perag e oa trenket ar zoubenn e Bod-Onn abaoe an deiz milliget-se. Pegeid, va Doue, e padfe eur vuhez a-seurt-se ? Ne wele diskoulm ebed d'ar gudenn. Paneved e oad, e-nije Pol tapet e gerh ganti. Siwaz ! aonig en em gave dirag he mab. Ha gand-se e kave abeg e kement tra a ree-efñ. -Ruza er skol-veur gand yaouankizou a-seurt gantañ, abuzi amzer ha me 'oar-me petra c'hoaz !

« Ahanta 'ta, Dell ! Poent e vije lakaad eun termen d'ho fachiri, 'gav ket dit ? »

Asa ! Ne oa ket bet touellet ! A-du e oa an tad gand ar mab. Hag hi, losket gand he imor. E barr ar galonad a grogas enni, ez eas er-mêz da guzad he daelou.

*
* *

Ema Pôl e toull an mor. Lakaad a ra e valizenn war an treuzou ha selled a ra ouz al leur, ouz ar hreier koz toet gand mein glaz hag a zo eul liou espar o para war o mogeriou. Selled a ra ive ouz ar wenojenn a gas d'an devenn; ar wenojenn-ze hag a oa leh dudiusa e huñvreou a vugel. Aze e heller spurmanti ene an ollved. Ahano e heller santoud c'hwez c'hweg an aod - hini ar mor pa vez lano, hini ar bezinou pa vez tre. Leun eo e spered gand ar zoñj euz an amzer dremenet - al levenez didrabas hag a rene en tiegez hag a oa troet e trubuilhou ar miziou diweza.

... « Mond a rin kuit euz ar gêr. Leun-barr eo va halon pa welan penôz 'ma kont amañ. Echu ar jeu. Kavet 'm-eus eun tamm labour e Brest ha feurmi 'rin eur gambr eno ».

E dud n'o-doa rannet ger gand ar stênet e oant. Pêr e-noa grêt eur hruz d'e ziouskoaz - petra 'ri ! - tra m'edo Dell o waska war he doan par ma helle; abaoe eur pennad e oa deut reiz ar paour kêz mamm, eun tamm brao ! Hag e-sell an disparti e houzañve e kuz...

Bremañ ema troet sellou ar pôtr yaouank ouz an ode a gas d'ar parkou. N'eo ket treh d'ar from a zav ennañ a-dôl-trumm. Kavoud a ree dezañ, n'eus ket keid-se 'zo, penôz e-nije bourret mond d'ar parkeier da heul e dad da zeski ar vicher. Chom stag ouz an douar ha beva e-skeud ar gwez onn o waredi an tiegez - sed aze hag a zerefe outañ. Soñjal a ra pegen plijuz e vije bet tremen an nozveziou goañv dirag an oaled, digor frank an nor

da gement den o klask bod ha mignoniez. Hogen, kement-se a zo êt da get ha da netra. Dre faot piou ? Piou bennag 'zo da veza tamallet, eo re ziwezad bremañ evid klemm; rag an dibab e-neus grêt e gas da benn ha red e vo evid e zeveni dilezel meur a huñvre kaer.

Tremen-poent eo mond kuit, med erru 'eus beh warnañ ha ne gred ket kimiadi diouz leh e hanedigez ken buan ha tra. Peleh ema e vamm ? Peleh ema e dad ? Da genta penn e krede e vije gweloh dezañ mond dre guz, kuit a gaoud neh. Med pa 'z eo deut ar poent d'ober e zoñj, setu m'eo lakêt diêz. Ne hell ket kuitaad e dud e-giz-se. Selaou 'ra gand aked trouziou an atant o tivori. Tarzet eo an deiz hag e hell klevet ar chatal o champalad en o hreier. Daoust hag-eñ ema e vamm ouz o goro ? Hag êt eo e dad d'ar park ? Ema da vad etre daou. Ma ! Amzer 'zo. Hag eñ da vond gand ar wenojenn. Mond a ray war an devenn da arvesti c'hoaz ouz ar vro, ar mor, ouz kement tra a laka anezañ da dridal.

Glao 'zo bet e-pad an noz ha seul freskoh-a-ze eo dindan gwasked ar gwez a ra d'ar harrontig eur volz a hlazur. Anez ez eus pres warnañ, e chomfe Pôl da strani paneve med evid garanti don en e gorv hag en e vemor ar frondou yahuz a zo o sevel diwar an douar hag an deliou gleb. Mall e-neus d'en em gavoud e penn an hent. Hanter-vouget gand eur frap avel-vor, boudinnet gand ar hreñvder anezi e chom krenn a-zav. Ar fru a nij beteg ennañ a laka war e vuzellou blaz kraz an hollen.

Daoust hag e vro a vo treh warnañ ? Daoust hag hud ha hoalerez ar bed en e splannder a skarzo dizamant e vennadou kaerra ? Bervi 'ra en e greiz eur c'hoant diroll. Rannet eo e galon etre daou dra hag a zo ken prisiuz an eil hag egile.

Serret e zaoulagad gantañ, e kred dezañ gweled e vignoned, ar re o-deus choazet ar memez stourm; ar re o-deus lakêt o fiziañs ennañ. Hiniennou anezo

a zo bet taget gand an dihoanag ive, deiz pe zeiz, hag ouspenn unan e-neus ranket dilezel diechu an ero boulhet gand kement a virvidigez. Evelato, den ne lavarfe tra ma hoarvezfe kemend-all gantañ. Dieub e oa. Hogen, daoust hag an dieubidigez - se ne oa ket anezi an hent striz a 'z eer gantañ en deñvalijenn hag en digenzez ?

Neuze e tro kein ouz ar strobinnellou m'edo dindan o beli kentoh hag e vale warzu an ti da gerhad e valizenn.

*
* *

Sell, aze, war dreuzou an nor, ema e dad hag e vamm ouz e hedat. Dao dezañ kimiadi diouto neuze, ha seul krisoh-a-ze e vo. Tostaad a ra, morlivet ha lentig evel eur bugel bet o hoari eun dro-gamm bennag. Kompren a ra a-greiz-oll pegen braz e tle beza o anken pa grog from trumm ennañ. Gweled a ra e dad o tond davefañ hag e vamm, difiñv, o firbouchal e-barz he godellou. War he diweuz e-neus merzet eur mousc'hoarz tener tra ma ruill daelou war an dremm karet, an dremm-ze roufennet gand ar bloaveziou. Hag en eur vriata he mab gand he oll nerz e tistag a-greiz eun huana-denn :

« Amañ ema da di, mab. Deus buan endro. »

... A-hont, e-touez ar gwez onn ema e annez. Hag an avel-vor a zigas ganti ar geriou brezoneg kaer-ze roet dezañ gand e vamm evel alhwez e eürusted da zond.

Mezeven 1976.

DISTERACHOU DIWAR NETRAIG

E SKEUD AR BINVIDIGEZ

N'eo ket eul loch ki, nann, ar garaj a zo dindan an ti. Eun hanter dousennad otoiou a heller êz tre repui e-barz, hag eur h/kawasaki bennag ouspenn war-bouez muzulia strisohig ar plas d'ar zadorn da noz. Ha c'hoaz e chom diañgaj ar riboul a gas da doull ar poubellennou. Aze, dindan genou frank an dislonker-loustoniaj a ziskenn euz an eil estag d'egile a-hed ar vogez, e teu d'en em vernia an oll vohaj o-deus ar merhejou d'en em zizober diouto evid derhel kempenn o hegin. Pluskachou avalou-douar a deu d'en em gemmesk gand eskernachou yer, tammou bourlas ha migorn; buzugennoù hir makaronied lipous en em dortuill war gribou hir an drein pesked; bozadou brikoli poaz a gouez fataklao war boestou sardined goulo leun a zrujoni; podou a beb seurt, koaven pe goñfitur o tivera diouto, a ruill a beb tu war dammou fourmaj flêriuz e-kichen troñsadou bara mouchenn, gwenn ar minvig anezañ evel ene eur plahig war he fask kenta.

Eur baradoz me gred, pe eur hao Ali-Baba d'an nebeuta evid kizier kollet or strêd. Loenedigou dicheñsuz, dizano, diberhenn, ha na gredont ket zoken miaoual gand aon e vefe dizoloet o zoullig-kuz. Den ebed da floura dezo o hein disvlevet nemed eur mizerig bennag evelto, eur hlasker-bara o furchal, eñ ive, ar poubellennou araog an

deiz. N'eo ket beb sadorn da noz en em vod logod kêr Vrest evid eur surboum ! Mond war an deiz beted eul liorz publig d'en em skoacha en eur vodenn ha gortoz ma teuio eur filip diboell war-hed ho pao, pe eur penn-duig dievez ? Gwall avañturuz ! Kalon vad a zo, a leverer, gand paotred an S.P.A. N'ouzer morse koulskoude petra a deu ho planedenn da veza ma taol ar vadoberourien-se an dorn warnoh. Eur gentel a zo bet roet deom gand al laou. Kollet ar ouenn diouto abaoe m'int kouezet e rouedou hoaluz ar « Marie-Rose ». Laoskom ar « maro dre hwez vad » gand Yann-Banezenn. Dalhom d'ar frankiz keit ha ma vo ano anezi.

Gwechou 'zo, pa dremenan dre ar garaj, abred deuz ar mintin en eur vond gand va hi er-mêz, e kavan unan euz an anevaled-noz war-horre va oto, deut da hluda pa oa klouarig c'hoaz toenn ar moter ha chomet aze da-houde da hortoz an deiz da zond. Tamolodet sioul en eur rollad evel eul laouenn-dar en deñvalijenn. Dizouj kaer. A-boan ma houzañv fiñval e valvennou pikouzennet ha sila eur zell trameg ar hi.

— Sell, Bidoulig. Eun targaz !

Med pa astennan va breh war-zu ar haz, Bidoulig eñ ne zell nemed ouz penn va biz-yod. Gwelloh evid va sinadou, an tres a lak anezañ war an hent mad. Hogen, pa wel ar haz d'e dro, ne ra ket muioh a van evid eun azen korneg dirag ar Joconde.

— Te moarvad, a zoñj eñ, eo eet ive an oad gwella dreistout. Da betra e talvezfe klask rei da gredi ez eus ahanom enebourien touet evel on tadou-kuñv ? Eun neuz-emgann memez-tra, ma karez, da ziskouez e chomom feal d'an hengoun. Deom da houzañv ive n'eo ket c'hoaz kennebeud peurvario tan ar yaouankiz en or gwazied.

Ar haz o veza komprenet a ra eun dufadennig zeh en eur dehoude, keit ha ma ra Bidoulig eun hanter-hrougnadenn o tenna d'eur jilpadenn muioh evid d'eun harzadenn wirion...

Degouezet zo bet ganin, eur wech m'am-oa dizoñjet kloza gwerennou va oto deuz an noz, mond d'am labour, an deiz war-lerh, gand an targaz rouz kousket e-touez pallenn ar gador-adreñv.

Nebeud a dra. Eur hoariell e-skoaz ar pez a hoarvezas ganin eur mintinvez goañv, pevar bloaz 'zo. Teñval-sah oa pa guitais ar gêr. Glac-puill a ree. Mil boan am-oa o weled va hent, daoust d'ar gouleier ha d'ar skuber-gwerenn o vond hag o tond dirag va fri.

E oan war bont Rekourañs pa glevis, souden, a-dreñv va hein, rohadenn eun den o sevel deuz e gousk. Va oto, war an tîl, a reas eul lamm war-araog evel eur gazeg yaouank torret ganti he zugellou. Va divesker dindanon ne oant nemed diou vragezennad stoup. Edo va gwad o trei e dour.

— *Faut pas avoir peur, Monsieur* a chaokas an urupail dreist va skoaz. *Faut m'eskuzer.*

Brao da lavared ! Koulskoude... Evel eur vogidell drebet gand eur goarenn heol, ar spont a dehas diwarnon pa wellis a-zioh din, dremm an den er mellezour-eneb. Gouzoud a reen piou oa ar pôtr, koulz ha pa vije bet eun amezeg, heb din goùd al liou euz e ano avad. Aliez awalh oan bet tremenet tost dezañ pavezo o ruzikad e dreid tro-war-dro d'ar gar, pe o rambreal, hanter-voredet war unan euz ar ekiñvier-diskuiz dindan gwez koadig an Is-Prefedi war vordig an hent a ziskenn da Borz-Trein.

Soñj am-eus, evel pa vefe deh, euz an devez am-oe bet an darempred kenta gantañ. Tomm oa an amzer. Eun toullad mammou oa o heoliata el liorz Kennedy, o ribitaillou oh ebatal er poull-dour a zo e-kreiz. Gwisket propig awalh, eur rumm espadriou glaz en e dreid ha n'eo ket eur re voutou-lêr laosk evel kustum, digor frank kolier e roched war eun torkad reun, va den oa o pakedi restachou e bred hag o lakaad da goueza d'an douar ar bruzunachou bara chomet a-istribill ouz bleo e beultrin diskramail. Pa glevas trouz lapadennou va hi oh eva dour harp outañ e troas davetañ, eun askorn morzed killog en e zorn.

— Eur zigaretenn marteze ? - E oan end-eeun o voulha eur pakad gauloises.

— Gand plijadur, emezañ. Eur gwall vutuner zo bet ahanon e-doug ar wech.

Eun droiad, tommedig dezañ, evel ma oa ive sur awalh deh da noz p'eo diskennet er garaj da glask lojeiz ha repu em oto, an den a zizoloas din sekred e vuhez. Pa oa galvet da vond d'ar brezel e kuitaas Rouen el leh ma oa micherour, o leusker war e lerh eur wreg yaouank. Pa deuas endro, goude beza bet prizoniad epad pevar bloaz, e kavas an ti goullo. Eun tîl horz war e benn a vije bet skañvoh...

Diwar neuze en em lakaas da gantreal war heñchou an diouannou hag an esperañs foll. Euz an Haor-Nevez da Vourdel, euz an Naoned da Gemper. Siwaz ! Roud ebed euz e bried. E Brest koulskoude, am-eus aon, e oa bet lavaret dezañ...

Morse n'em eus gellet gouzoud hirroh diwar-benn planedenn an den paour kouezet e puñs an dizesper. Kouezet ive, allaz, tamm-hatamm e reuzeudigez truezuz keizidi ar hêriou braz.

Ar wech diweza e welis anezañ edo o chaokad eur sandwich, harpet e benn gantañ ouz gwerenn eur stal leoriou er ru Siam. *La Chine de Mao, Le Hasard et la Nécessité, Ménie Grégoire, l'Archipel du Goulag, Le Cheval d'Orgueil, Manouche, Marcuse, Les Exclus, Prends garde à la douceur des choses, Raphaële Billetdoux... Dieu existe nom de Dieu...*

Eet on e-biou, heb en em ziskouez. Ar zul vintin e oa. Goullo ar ru. N'on bet gwelet gand den. Med mez am-eus abaoe...

Abaoe em-eus klevet ez eo maro.

Maro gand an dihoanag

maro gand an naon-kov e-kichenn poubellennou puill bourhizien diwar-re

maro gand an naon-karantez e-touez kizier dizoñv na gredont ket miaoual

Goude beza greet, araog mervel, donezon euz e gorr da Skol-Veur ar Madisinerez e Brest.

Ch. AR GALL
c'hwevrer 1977

**BEZIT SONJ DA BRENA AL LEOR KENTA
EMBANNET GAND BRUD NEVEZ**

« Karantez ha karantez », gand Naig Rozmor
15 lur e-leh 18 lur, beteg an 31 a viz meur
C.C.P. P.-M. Mevel 1499-55 Roazon

EN ANO AR GARANTEZ NAIG ROZMOR

Ha taolet ho-peus bet evez ne vez ket, pe nemeur, komzet euz ar garantez, e brezoneg ? Euz ar garantez etre eur gwaz hag eur vaouez, a fell din lared. Marteze n'eo ket kement bremañ ken, med eun dra da veza kuzet eo evid ar Vretoned, ha gerioù 'zo ne vezent lared nemed a vouez izel. Ne veze ket lavaret, peurvuia, « en em gared a ra an daou zen yaouank-se », « istim » pe « joa » eo o-doa an eil evid egile. Pe neuze, pa veze ar gaouz war an tu-ze, etre gwazed dreist-oll, pe zoken etre gwazed ha merhed, e veze troet da veza kentoh druz ha groz a-walh...

N'eo ket eston neuze ma n'eus ket bet skrivet a-benn ar fin kement-se a varzonegou (na marteze a skridou all) a garantez e brezoneg. Ma zo eun dra hag en-eus souezet Naig Rozmor p'eo en em laket hi da lenn brezoneg, eo an dra-ze. Ha p'he-deus kroget da vad, n'eus ket pemp vloaz 'zo, da skriva e brezoneg, eo barzonegou a garantez eo he-deus skrivet da genta. Rag dezi e vanke lennegezh a garantez en or yez, ha kredet he-deus e vanke ive d'an dud all. Petra d'ober neuze, nemed displega ar pezh a oa en he hreiz, ar pezh a veve, ha respont dre ze d'an ezomm a oa enni da lavared ar garantez.

Rag eviti eo ar garantez ar haerra santimant da zikour an den d'en em houzañv e-unan ha da houzañv ar re all. Heb ar garantez, ne vefe 'ket bevapl ar vuhez. Hag e-keñver karantez ar galon, ema dioustu karantez ar horv - ha n'eo ket hebken sevel tiegezh hag ober bugale eo (ar pezh, daoust ha beza kaer,

n'eo ket a-walh), kalz frankoh ha ledannoh eo evid se, eme Naig Rozmor. Hag e lavar : « *ar garantez etre ar houblajou a ro tro dezo d'en em zibrada an eil dre egile, dreist teñvalijenn ar vuhez* ».

Kaoud c'hoant da skriva hag hen ober a zo daou dra disheñvel avad. Ha n'eo ket deuet Naig Rozmor a-benn, euz an taol kenta, da skriva evel he-doa c'hoant diwar-benn ar garantez. Med Leonardez m'eo hi, ha levezonet gand Tagore « *hag a gomz euz ar garantez e-giz eur zakramant* », n'he-deus ket kavet gwelloc'h nemed komz anezi e brezoneg gand anioi a liderez. « *Kaer evel eur bedenn eo ar garantez* », alese ar barzonegou o ano « *alleluia* », « *lid* », « *gousperou* »...

Med eul liderez pagan eo ive ar garantez, hervez Naig Rozmor, ha setu perag barzonegou all anvet « *sabad* » pe « *Mari Vorgan* », hag ar stumm-ze da skriva hag a zo dezi ha ne gaver e skrid brezoneg all ebed. Konta a ra en eun doare gwirion-kenañ « *huanadennou he horv entanet* », n'an-kouanaha ket evid se n'eo ket ar garantez eur blijadur hebken - pe neuze, evel a lavare din, « *n'eo ket libr an den ken* » - med « *eur gomunion souezuz / deuet d'or skoulma korv hag ene / beteg ar beure.* »

Gand komzou tener - « *ken tener ha bleuniou mae* », a zo bet lavaret dezi - ha kizidig zoken, eo e ra Naig Rozmor pa skriv he barzonegou a garantez. N'eus ket enno, er mod m'int skrivet, hag en amzer hirio dreist-oll, peadra da feuki den ebed, ma oar an den petra eo ar vuhez. Ha koulskoude he-deus bet diegi o rei barzonegou 'zo d'embann. Gwir eo, maouez eo hi, dre heh oll wazied, hag e oar, dre vicher, petra eo lakad eul leor etre daouarn unan bennag, e hell beza eun dour a vuhez pe eur hleze d'e laza. Eun himn a garantez eo e vo leor Naig Rozmor, ma hellan ober va unan gand eur ger a liderez n'he-deus ket hi implijet c'hoaz, a gav din. Ha mond pelloc'h a ra zoken, pa ziskouez, « *en ano ar garantez* » bepred, « *ar plahig gwerzet d'ar pinvidig* » hag « *ar mevel gwallgaset gand e vestr* »...

Koulskoude, farsal a oar ober ive Naig Rozmor, ha goapaad zoken. Ha skañv e hell beza he 'fluenn da fenti, na pa vefe nemed diwar-goust « *an tousegi mod nevez* » hag o-deus laket meur a hini da c'hoarzin dija...

Gwir eo he-deus Naig Rozmor eur stumm da skriva hag a zo tre diouz doare ar brezoneg. Skriva e galleg he-dije bet gellat ober, hag he-deus bet greet, a-hed he buhez koulz lared. Med pa oa yaouank, eno e oa ar brezoneg yez ar gêr - an hini a veze paket o kaozeal galleg e-neveze eul litrad da bêa ! - hag e brezoneg eo he-deus bet skrivet d'he zud, pa oa er skol e pañsion « *abalamour din da helloud konta penn-da-benn va doare d'am zud, dre ma ne ouie ket ar vestrez a vrezoneg !* ». Gand he zud, gand tud euz heh anaoudegez, he-deus bet atao evel mez o kaozeal galleg.

Pa 'z deuet eun nebeud bloavezjou 'zo Visant Seite, heh amezeg, da houlen skoazell diganti, n'eo ket bet gouest da lavaret nann. Lonket he-deus ar henteliou dre lizer diwar herr. Ha dre m'eo dezi eur blijadur skriva, eo kroget, dre ezomm ive, da zevel kontadennou hag istoriou. P'he-deus santet e oa barreg da zisplega difazi he santimanchou donna, eo en em laket da skriva barzonegou.

Setu aze, kontet berr, istor Naig Rozmor, hag istor he barzonegou. Ar barzonegou-ze e eo a raio danvez al leor kenta a zo o vond da veza embannet gand Brud Nevez. An deiz all, e lavare A. Merser er radio eh embanner re a varzonegou brezoneg, ha re nebeud a draou all. Gwir eo marteze. Ral eo avad kaoud an dro da lenn en or yez barzonegou skrivet ken brao he ken êz, seurt ar re a zo bet skrivet gand ar vaouez m'eo Naig Rozmor. Pe blijet pe displejet e vo al lennerien - ha plijet eo e vo sur mad ar peb muia - souezet e vo an oll. Sed on sur o-devo c'hoant an oll da breza ha da lenn al leor-ze.

J. SALAUN



**BREIZ KEMERET
EVID
EUR VENngleuz**

Bremañ, gand an teknikou modern, e heller advoulla leoriou koz ha diviet, dres evel ma oant pa deujont a-zindan ar wask evid ar wech kenta. Eun ti moullerez, n'eo ket e Breiz, med er Hreisteiz, « Laffite Reprints » (1), e-neus adembannet e 1976 leoriou brudet, o tenna da istor Breiz pe d'ar Brezoneg, ha ne vezent kavet mui da brena, ker ruz, nemed er zaliou gwerzidigez.

Ema, « Laffite reprints » oh adembann evel-se « L'Ame bretonne », gand Charles Le Goffic.

Daou leor a zo deut er-mêz hag an daou all ne zaleint ket, Charles Le Goffic, deuz Lanuon, skrivagner gall, akademisian war fin e vuhez, a gemere Breiz, he zevenadur, he boaziou, he spered hag heh ene, evel m'e-neus greet meur a hini war e lersh, evid eur vengleuz, peadra enni da zevel e galleg flour penna-dou fromuz pe kuriuz evid brasa dudi lennerien Vro-Hall.

Kalz euz e venozioù a zeblant deom hirio kosaet ha diwar-lerh. Evitañ e oa Breiz o vervel, ar Vretoned hag ar Brezoneg war o zremenvan, hag aze, en eur zellod ouz ar gizioù koz o vond kuit, e kave e-unan, hag e klaske rei d'e lennerien, eur bijadur velkoniuiz.

Kaoud a reer evelato, e pennadou zo euz « L'Anne Bretonne » studiadennou talvouduz diwar-benn istor al lennegezh : Narsis Kellien, Kervarker, an Uhel e Keramborgn, C'hoariva ar Bobl, Adzao ar Gelted, h. a.

P.M.M.

(1) 106, bd Longchamp, F. 13001, Marseille.

(2) 90 Lur peb leor, E 1908, e oa bet embannet « L'Ame Bretonne » evid ar wech kenta.

**AR BAGOU
DRE LIEN**

Eur pikol leor eo hini Jean le Bot (1), kelenner e Skol-Veur Roazon. Ennañ ez eus luhskeudennou ha tresadennoù dedennuz meurbed evid kement hini a gar traou ar mor, ar vartoloded hag ar bagou dre lien.

Kaoud a reer amañ gerioù brezoneg, re rouez evelato, peogwir e oa, hag ez eo atao aliez, ar brezoneg langaj ar besketerien. Anoiou ar binvioù dastum bezin a zo merket sur a-walh diwar ar studiadenn savet gand Per Trepos (Enquête sur le vocabulaire breton de la ferme) : an troumpler, ar vignat, ar hrog-soun, ar hrog-bag.

Kanaouenn « Paotred Rosko » a zo treuzskrivet gand kalz a fazioù.

Souezet om bet o lenn e fin al leor ano P. Trepos (Doue d'e bardono) skrivet : Trepoz M. ! Eur vastarenn en eul leor ken kaer ha ken ker !

(1) Jean le Bot. Les bateaux de la Bretagne Nord aux derniers jours de la voile. Les Quatre Seigneurs, Grenoble. 290 lur.

**BRUD NEVEZ OH EMBANN
EUL LEOR KENTA
NAIG ROZMOR
KARANTEZ
HA KARANTEZ**

BARZONEGOU

Da rakprena betek an 31 a viz meurz :

15 lur, e-leh 18 lur (hag ar mizou-kas ouspenn)

**KEMENT HINI E-NEVO BET KAVET
5 KOUMANANTER NEVEZ DA VRUD NEVEZ
A VO KASET AL LEOR DEZAN EVID NETRA**

**EMBANNADURIOU
EMGLEO BREIZ**

Evid studi pe kelenn ar yez :

* **KOMZOM, LENNOM HA SKRIVOM BREZONEG,**
gand **J. Tricoire**

Diou levrenn : Kenta lodenn · Eil lodenn	pephini :	25 F
Diou bladenn da heul al lodenn genta (KLT)	24 ha	28,50 F
Eur gasetennig e brezoneg Leon, da heul an eil levrenn	40	F
Evid Bro-Wened : eur gasetennig evid al lodenn genta	30	F

* **AR BREZONEG DRE RADIO,
LE BRETON PAR LES ONDES,** gand **V. Sèité**

Daou levr :	
Kenta levr, (evid ar re a zo o kregi gand ar studi)	17,50 F
Eil levr (eil bloavezh)	19,50 F
Eur gasetennig da heul peb levr	pephini : 30 F

* **Al levrioù-ze eo a vez implijet gand ar Hentelloù dre lizer-mañ :**

- **Levriou J. Tricoire :** Kentelioù dre Lizer Skol ar Merher, A. Merser, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest
- **Levriou V. Sèité :** Skol dre lizer, V. Sèité, Ti-Carré, 29150 Kastellin

Da veza goulennet en oll stalioù-levrioù pe digand :
EMGLEO BREIZ, B.P. 17, - 29266 Brest Cedex
C.C.P. EMGLEO BREIZ, 1649-07 U Rennes

BRUD AR YEZ HAG AR VRO

KALANDER

- N'eus ken nemed diou veilladeg da veza ken, gand Strollad Beilladegou Treger : unan d'an 12, hag an hini diweza e Tregastell, e sal nevez ar gouelioù, d'an 19.

- Breiz o veva a vo skignet gand FR 3 d'ar 5 ha d'an 19 a viz meur, da 6 eur ha kard diouz an abardae; adskignet e vo war A 2, d'ar 7 ha d'an 21, da eun eur 5 goude Kreisteiz. Abadenn ar 5 hag ar 7 a dlefe beza, hervez ar pezh a zo bet kemennet deom, diwar-benn amzer nevez an delenn geltieg e Breiz, gand Alan Stivell, K. Nagues, hag an daou vreur Keffeleant.

LEORIOU NEVEZ

Eun nebeud leoriou nevez a zo deuet er-mêz ar zizuniou diweza-mañ. Mene-gom dreist-oll :

- « *Géographie de la Bretagne* », bet savet gand eur skipaill a gelennerien hag a glaskerien, hag embannet gand « Skol Vreiz ». Eul leor evel ne oa ket c'hoaz.

- « *Ma Dalton* », unan euz istoriou brudet Lucky Lucke, bet troet e brezoneg hag embannet gand Skol an Emsav.

Hirroh e vo komzet diwar o fenn e niverennoù da zond Brud Nevez.

GOULENN SKOL VREZONEG E PLOGO

Ar gerent o-deus goulennet ma vefe kelennet ar brezoneg e-pad eur hard eur bemdeiz d'o bugale, e skol publik Plogo.

PESEURT BREZONEG AN HINI MAD ?

Hennez eo talbenn eur pennad e-neus skrivet Erwan Evenou e niverenn 85 *Pobl Vreiz*, hini miz c'hwevrer. « Ne vez ket dao d'ar Vretoned, emezañ, turia o fenn peb gwech m'o-devez c'hoant da lared eun dra nevez, pa vez dija eur ger mad implijet e kement bro... »

STAJ EVID AR VISTRI E BREST

Eur 25 a vistri hag a vestrezed skol a zo bet e-pad vakañsoù miz c'hwevrer e Brest o heulla ar staj a oa bet laket war zao gand Andreo Merser en ano Skol Vrezoneg ar Merher hag an F.O.L. Studia ar brezoneg ha penaoz ober skol vrezoneg eo o-deus greet.

LOEIZA AR MELINER

Marvet eo Loeiza ar Meliner. Bez' e oa hi intanvez ar skrivagner gwenedour Loeiz Herriou. Hi heh-unan he-doa bet kenlabouret da Z'ihunamb ha savet he-doa bet eul leor sorbiennou « Ar Bont er Velin ». D'an oad a 90 vloaz eo marvet.

TELE BREZONEG

Goude ar gwall-daol bet greet a-eneb ti ar redevansou-tele, e Roazon, e-neus kemennet Rener FR 3 e Breiz e oa bet skignet e 1976 : 144 eurvez a vrezoneg er radio, hag 11 eurvez 36 munut en tele.

N'ao ket re. Perag, da hortoz gwell, ne vefe ket kresket an abadennoù brezoneg *dioustu* euz eun hanter ?

4 fennad a-bouez en trede niverenn-mañ euz Brud Nevez :

- A. Keravel, hag a glask sklêrijenna ahanom war ar bromesa a skrid-diazez bet greet e Ploërmel gand Prezidant ar Republik : daoust hag-eñ ne vo ket eur respont goulo d'or goulennou ?
- eun danevell gand K. Brisson : istor a-vremañ eun tabut etre eur vamm, eun tad hag o mab, azaleg m'e-neus laket hemañ en e benn ne gomzfe ken nemed brezoneg
- billed Charlez ar Gall : taolenn « very realistic » ha reuzeudig ar vuhez er haviou hag er garajou dindan zouar, en eur gêr vraz
- eur pennad diweza diwar-benn ar skrivagnerez Naig Rozmor, hag ema Brud Nevez o vond da embann he leor a varzonegou ar zizuniou-mañ.

Quatre contributions intéressantes au sommaire de ce n° 3 de Brud Nevez :

- un éditorial d'A. Keravel, s'interrogeant sur ce qu'apportera à la langue bretonne la charte culturelle promise à Ploërmel par le Président de la République : sera-t-elle une fausse réponse aux revendications ?
- une nouvelle de K. Brisson : l'histoire actuelle de dissensions au sein d'une famille, à partir du moment où le fils a décidé de ne plus parler que breton
- le billet de Charles le Gall : un tableau très réaliste d'une triste vie dans les caves et garages souterrains d'une grande ville
- un article sur Naig Rozmor : Brud Nevez va publier prochainement le recueil de ses poèmes. Le recueil est en souscription, page 23.